



G U E R Z

*Composet a nêve var sujet ur Mal ur êruet en
Bourg Plestin, er 17 a viz Du 1817.*

Var ton ar Seis Maleur.

GOERC'HES glorius Vari, d'êc'h en em adressàn;
A speret hac a galon ouzoc'h e c'houlennàn
Sclêrijen da zisclêrya dirac ar gristenien,
Eur maleur epouvantabl hac euzus da gompren.

Er zeitec eus avis Du, ebars en bourg Plestin,
E savas an den yaouanq al lun deus ar mintin,
Er bra mil eis cant seitec, oajet a nontec vla,
Hac e parti ahane, ep sonjal a netra.

Mont a ragant plijadur da Loc-Miqel an-Très,
Da zansal, da ebati deiz gousper Sant-Vodes;
Echui ra e zevez, mes er pen diveàn,
E roas al liberte d'an drouc-æ l varneàn.

Setu amàn ar gusuil en deveus recevet,
O tistrêy d'ar gêr en hent digant an drouc-speret,
Cometi en eur antren e creis ar vilajen
Ar maleur epouvantabl hac euzus da gompren.

6

Pa antren ar miserabl en ti da glasq e goan,
 E cavas ar femelen o comanç dress an tân,
 Daou bleget ous e hoeza da doma he zouben,
 Evin comanç disclèrya dirac ar gristenien,

Tapout a ra'r maleurus crog en eur falz-contel,
 Ha sqêy tri dol var he goug, den barbar ha cruel!
 Ar femelen ancien, tizec ha tri-ugeut,
 Mari ar Vod he hano, evit rêy da entent.

Goude m'en deus-hi scoet ha beuzet en he goad,
 E tisqeus evit petra e ra ar miserabl:
 Ar pres en deus digoret da zestum an arc'hant,
 Ha partial ac'hane ractal en un instant.

Mes petra a dal deân? ne ell qet mont a bell;
 Goude e grim detestabl en deus renqet mervel.
 Comzou Jesus da Zant Pêr, pa voe bet qemeret:
 „ An hini a buniso a vezo punisset. ”

Ur boulanjer o tistrêy a varc'had Guerlesquin,
 A antreas varnezi, habitant a Blestin,
 Hac a vanas estonet, o velet ar maleur,
 Qen a grên e oll vemprou, hac én êru er gêr.

E dud a c'houlén outàn, o velet e eston,
 Petra voa êruet gantàn ma lampe e galon,
 Ha ma voent epouvantet o clêvet ar maleur
 Pini en devoa guelet ebars er memes heur.

Sebeliet ê ar vreg-màn, laqet en he guele,

7

Hac e deus bet ar bonheur, a drugare Doue,
 Da goves ha da receo he oll Sacramanchou,
 Qent ma eo bet decedet : Doue d'e fardono.

Ar bêleg goude'n nouen, a c'houlennas outi
 Mar gouje en guirione donet da zeclari
 Piou e devoa y massacret. vit ma vije heuillet
 Ha gret e broces-verbal, ha goude punisset.

Disqarga ra qent mervel, he oll amezeyen,
 Vit na vije prezumet na mormuret var den ;
 " An domestiq a veven hac enan va fianç,
 " A ra din coll va bue evit va recompanç."

Entêret eo ar vreg-mâ gant henor ha respet
 Ebars en beret Plestin, en douar biniget,
 Me a c'houlen a galon barados d'e ene,
 Graç ma vezo recevet en joaustet an êe.

Hac ar maleurus zo bet oc'h ober pinijen,
 A gichen difin mis Du bete mis Gouelen;
 En eil devez eus ar mis eo bet gillotinet
 Er gêr eus a Lannion, p'en devoa meritet.

Pa deuas eus ar prison, da vonet d'ar maro,
 E cléo cléyer ar Vali oc'h ober e gânvou.
 Dont a ra bete'r chafod qer buan ha pep den;
 O Doue! trista maro ha goassa planeden!

Pas-ha-paz ez eo heuillet gant ar bêleg santel,
 Convertisset eo gantân qent ma teu da vervel.

8

Bet en deus an absolven eus e oll bec'hejou,
Qent pignat var ar chafot, da zoufri ar maro.

Pedi ra'n Otrou Nayrot, Person eus a Blestin,
Ennes voa e conductor hac en beuill bete'r fin,
Da ober instruccion d'an oll coz ha yaouanq,
Ha particulieramant d'ar re a voa presant.

Me dle bea mizillour da gement a garo
Qemer exempl diouzin o vonet d'ar maro,
Da teuill an offiç divin evel guir gristenien
Ma vezint victorius var ar goel blaneden.

Goul a ra'r Person devot pardon digant Doue,
Hac an oll asistantet a avertis goude
Da reñonç d'an nosveziou, d'ar jeuyou milliget,
A zo coz da vil maleur dre bêvar c'horn ar bed.

Goulennomp digant Doue hac e vam ar Verc'hez
Pa zefomp eus ar bed-màn hon lod er barados,
Graç d'emp d'en em velet er fin eus hor bue;
O jouissa assambles ed barados an êe.

FIN.

E MONTROULEZ, e ti LEDAN, e traon ru ar Vur.